

I

C'hoant bras 'peus goût petra zo degouezhet ? Ma. An dra gentañ a fello deoc'h goût, moarvat, eo pelec'h e oan-me ganet, ha penaos e oa tremenet va bugaleaj laou, ha petra 'rae va zud, hag all, a-raok ma vefen-me ganet, ha tout ar c'hozh koñchennoù-se, 'doare David Copperfield. 'Faot ket din kontañ deoc'h, evit lâret deoc'h ar wirionez. Da gentañ tout peogwir e kavan torr-penn tou'n traoù-se, hag ivez peogwir e tapfe va zud bep a daol-gwad, ma n'eo ket daou, ma lârfen an disterañ tra personel diwar o fenn. Kizidik-tre int war an traoù-se, va zad dreist-holl. Tud *a-zoare* int – arabat lâret – met kizidik-abominapl o-daou ivez. Forzh penaos, 'maon ket o vont da gontañ deoc'h va c'hozh tamm buhez a-bezh, na seurt all ebet. Netra ne lârin, war-bouez an darvoud droch-se a zo c'hoarvezet din 'tro mareoù Nedeleg tremenet, just a-raok din bezañ trapet fall ha kaset betek amañ da zistanañ. Pas hiroc'h 'vit pezh 'm eus lâret da D.B., hag eñ ma breur koulskoude. E Hollywood emañ hennezh o labourat, pas gwall bell eus al lec'h tristidik-mañ, ha dont a ra da welet ac'hanon bep dibenn-sizhun, koulz lâret. Kas a raio ac'hanon d'ar gêr pa vo deuet ar poent, 'benn miz 'michañs. Ur Jaguar 'n deus, ya va faotr. Unan deus

ar c'hirri bihan saoz-se a c'hell tizhout 300 kilometr an eur. Tost pevar mil dollar 'oa bet koustet dezhañ. Bremañ n'eus glaou forzh pegement. A-raok 'oa ket memes kont gantañ avat. Pa oa o chom er gêr e oa ur skrivagner rik, evel ar re all. E ken kaz 'pefe ket klevet diwar e benn, gantañ eo bet skrivet al levr danevelloù dreist-se, *Ar pesk aour kuzh*. Ha gwellañ istor en dastumad eo henezh justamant, gant an titl-se. Diwar-benn ur mousig bihan ha ne felle ket dezhañ e sellfe ar re all ouzh e beskiq aour abalamour ma oa bet prenet gant e arc'hant dezhañ. Re vat 'm boa kavet henezh. Bremañ 'mañ ar paotr D.B. ba' Hollywood, oc'h en em werzhañ evel ur c'hast. Ma 'z eus un dra 'm eus euzh outañ eo ar sinema, me 'lâr deoc'h. N'on ket evit klevet an anv-se zoken.

Fellout a ra din kregiñ gant an deiz-se, pa m'boa kuitaet Pencey Prep. Pencey Prep zo ar skol-se, e Agerstown, Pennsylvania. Klevet 'peus anv anezhi, moarvat. Pe gwelet ar bruderezh, emichañs. Brudañ a reont e-barzh nouspet kazetenn warn-ugent, atav gant ur paotr chichant war varc'h o lammat dreist un harz. Evel pa vije graet netra e Pencey, nemet c'hoari polo 'pa'n deiz. Pezh zo, biskoazh n'em eus gwelet marc'h ebet el lec'h-se na tro-war-dro. Ha dindan poltred ar paotr war varc'h e kaver skrivet atav : « Abaoe 1888 emamp o c'hoveliñ paotredigoù e stumm gwazed yaouank hollgaer ha lemm o spered ». Loagaj tout. Ne vez ket goveliet muioc'h e Pencey eget 'barzh ar skolioù all. Hag eno n'em eus gwelet den ebet hag a oa hollgaer, na lemm e spered kennebeut. Ma. War-bouez daou marteze. Ha c'hoazh. Ha moarvat e oant evel-se dija a-raok dont da Bencey.

Ma. Forzh penaos e oa d'ar Sadorn, deiz ar match

football 'enep Saxon Hall. Ar match-se gant Saxon Hall zo sañset bezañ an darvoud meur ma 'z eus unan e Pencey. Krogad diwezhañ ar bloaz e oa, ha ma teufe Pencey da goll ne oa nemet un dra d'ober, en em zistrujañ pe me 'oar-me. Soñj 'm eus, tro teir eur abardaez d'an deiz-se e oan pignet war lein Thomsen Hill, en nec'h tout, 'tal-kichen ar c'hozh kanol brein-se, a oa bet ba' Brezel an Dizalc'hidigezh ha tout. Alese 'veze gwelet an dachenn a-bezh, warni an daou skipailh oc'h en em zrailhañ par ma c'hellent. Alese ne veze ket gwelet ken splann an tribun bras, met klevet 'veze re Pencey avat, gant o youc'hadennoù don ha spouronus, rak deuet e oa ar skol a-bezh pe dost, war-bouez ho servijer. Eus tu Saxon Hall ne veze klevet nemet un tamm trouzig dister ha treut, rak morse ne zeue nemeur a skoazellerien da heul ar skipailhoù diavaez.

Rouez e veze atav ar merc'hed er c'hrogadoù football. N'eus nemet ar baotred goshañ a c'helle kas merc'hed ganto. Ur skol vrein eo Pencey, forzh peseurt mod 'vefe sellet outi. Plij' a ra din bezañ 'lec'h ma vez gwelet merc'hed ur wech an amzer d'an nebeutañ, ha pa vijent o skrabañ o divrec'h pe o c'hwezhañ o fri, pe zoken o skrignal sot tra ken, pe me 'oar-me c'hoazh. Ma teue alies-mat Selma Thurmer – hag hi merc'h rener ar skol – d'ar matchoù, ne oa ket honnezh eus ar seurt “kas c'hoant”, ma welit pezh 'm eus c'hoant da lâret. Ur plac'h amiapl a-walc'h e oa memestra. Ur wech e oan bet en he c'hichen er c'harr-boutin betek Agerstown, ha krog e oamp da zrailhañ kaozioù, ur seurt. Plijout a rae din. Ur fri bras a oa dezhi hag he ivinoù a oa krignet-tout betek ar gwad, ha ganti 'veze gwisket seier-bronnoù ken bourrellet ma ne veze gwelet nemet an dra-se. Ha gant se n'helled

ket tremen hep trueziñ un tamm outi. Pezh a gaven mat ganti memestra eo ne glaske ket kanañ meuleudi d'an den meur a oa he zad. Goût a ouie 'michañs ne oa henezh e gwirionez nemet ur c'hozh plouk hag un toull gaou anezhañ.

Ma oan-me war lein Thomsen Hill d'an ampoent ha n'eo ket en dachenn eo peogwir e oan o paouez dont endro eus New York gant ar skipailh iskrim. Ha me 'penn ar skipailh-se, soñjit 'ta. Ur pezh kaer avat. Ar mintinse e oamp aet da New York evit ur match 'enep skol MacBurney. Pezh zo, ne oa ket bet eus ar match. Kollet 'm boa ar maskloù, ar fleuredoù hag an holl beadra e-barzh ar metro. Ne oan ket an hini kiriek nemetañ avat. Diehan 'm boa ranket sellet ouzh ar gartenn, deomp da c'houzout pelec'h diskenn. Setu ni distro da Bencey war-dro div eur hanter ha n'eo ket da boent koan. Ha fas koad o doa graet ouzhin ar re all en tren e-pad an distro d'ar gêr. Pezh 'm boa kavet farsus a-walc'h, en ur mod.

Un abeg all 'm boa evit mirout a vont d'ar match, rak dav e oa din mont da lâret kenavo da Spencer, va c'helenner istor. Paket e oa gant ar grip, ha soñjal a rae din 'm befe digarez all ebet da welet anezhañ a-raok vakañsoù Nedeleg. Skrivet en doa un notenn evidon, o lâret e karfe gwelet ac'hanon a-raok ma 'z afen d'ar gêr. Goût a ouie ne oan ket da zistreiñ da Bencey.

Disoñjet 'm eus kontañ deoc'h an dra-se. Skarzhet e oan bet. Ne oan ket sañset distreiñ goude Nedeleg abalamour 'm boa c'hwitet peder briziadenn ha peogwir ne lakaen ket va foan er skol, ha tou'n traoù-se. Meur a wech e oa bet lâret din diwall ma ne labourfen ket, dreist-holl war-dro kreiz an trimiziad, pa oa deuet va zud d'un emgav gant an Thurmer kozh. N'em boa graet striv ebet

avat, setu ma oan bet skarzhet. Se a zegouezh alies-mat e Pencey. Renket uhel-tre eo evit he disoc'hoù pedagogel, skol Pencey. Re wir eo.

Ma. Miz Kerzu a oa anezhañ, ha yen-ki e oa an amzer, dreist-holl war lein ar c'hast tuchenn-se. Ha netra war va c'hein nemet va mantell-c'hlav, manegoù ebet na seurt. Ar sizhun a-raok e oa bet laeret diganin va mantell blev kañval, em lochig end-eeun, ha va manegoù fourret e-barzh ar godell, soñjit 'ta. Leun a hailhoned e oa skol Pencey. Daoust ma teue un toullad mat eus ar skolidi eus familhoù pinvidik-mor e oa leun ar skol a hailhoned memestra. Seul keroc'h ar skol, seul niverusoc'h ar c'hwi-blaerien enni, hag ar pezh a lâran deoc'h n'eo ket gaou. Ma, eno e oan neuze, en va sav ouzh ar c'hozh kanol-se, o sellet ouzh ar match, revet ma revr ganin. Gwall nec'het gant ar c'hrogad ne oan ket avat. Ma oan o stlejal duhont eo peogwir e oan o klask plantañ e-barzh va fenn e oan da zilezel al lec'h da vat. C'hoarvezet 'oa bet din c'hoazh sachañ va skasoù diouzh skoloù ha lec'hioù all hep santout netra, hep goût din zoken. Ha se ne blij ket din, tamm ebet. Forzh pegen trist pe laou ar c'henavo, atav e rankan *santout* emañ o kemer kimiad pa guitaan ul lec'h. Mod all en em santer gwashoc'h c'hoazh.

Chañs 'm boa bet. A-daol-trumm 'm boa soñjet en un dra a c'hellfe kas un tamm sklêrijenn war ar perag e oan o skarzhañ kuit. Dont a reas da soñj din e oamp ur wech, me ha Robert Tichener ha Paul Campbell, se 'oa tro miz Here, 'm eus aon, o skeiñ er volotenn dirak ti ar gelennerien. Paotred vat e oant o-daou, Tichener dreist-holl. Just a-raok koan e oa, ha dont a rae ar serrnoz warnomp, met kenderc'hel a rejomp d'ober kasadennoù gant ar volotenn. Tenval-teñvaloc'h e teue da vezañ,

a-boan ma veze gwelet ar volotenn ken. Padal, ne felle ket deomp chom a-sav ganti. Paouez hon doa ranket ober avat. An aotrou Zambesi, kelenner war ar biologiezh, a oa deuet d'ar prenestr e sal ar gelennerien, ha lâret deomp mont en-dro d'ar c'houkva ha bezañ prest evit koan. Ma, mard on gouest da gaout soñj eus seurt traoù e c'hellan aozañ din ur c'himiad, pa 'm bez ezhomm. 'Fin, peurvuiañ, da vihanañ. Neuze, kerkent ha kavet an doare d'en ober 'm boa troet kein, ha me ha redek etrezek tu all an dorgenn, etrezek ti ar Spencer kozh. Ne veve ket war ar c'hampus. War Bali Anthony Wayne e oa o chom.

Treuziñ a ris al lec'h a-bezh en ur redek, betek ar gael vras, ha chom a-sav ur pennadig eno da dennañ va anal. Berr-tre eo va anal, ma fell deoc'h gouzout. Butuner daonet on da gomañs – 'fin, butuner e oan, rak lakaet on bet ganto da droc'hañ ar butun. Un dra all a zo : warlene 'm eus kresket deus pemzek santimetr. Ha dre-se 'm eus tapet an droug-skevent, hag on bet kaset d'ober tout ar c'hozh prouadoù ha radioioù ha tou'n traoù-se. Padal, un den yac'h a-walc'h on mod-all.

Ma. Kerkent hag adkavet ma anal 'm eus treuzet an hent 204. Riellet-spontus e oa, ha darbet 'oa bet din pakañ ul lamm. N'ouzon ket zoken abalamour da betra e oan o redek evel-se, moarvat peogwir e oa deuet c'hoant din redek, setu tout. Ur wech treuzet an hent en em santis drol, evel pa vijen bet o vont da goll, un dra bennak evel-se. Un abardaevezh eus ar seurt-se e oa, iskis, yen-ki, bann-heol ebet, ma vezer tonket da vont diwar wel bep taol ma treuzer un hent.

Fidandoue, 'oan ket chomet pell a-raok pouezañ war ar sonetenn pa 'n em gavis dirak ti Spencer kozh. Revet e oan penn-da-benn. Poan a rae din va divskouarn hag

a-boan ma c'hellen fiñval va bizied. « Deuit 'ta, deuit 'ta, » emezon a vouezh uhel. « Ata, digorit an nor din, 'ta ! » A-benn ar fin eo an itron Spencer gozh a zigoras an nor. N'o doa matezh ebet, ha bewech e veze digoret an nor ganto o-unan. Gwall binvidik ne oant ket.

— Holden ! eme an itron Spencer. Nag ur blijadur gwelet ac'hanout ! Deus tre, 'ta, va faotr kaezh ! N'out ket marv gant ar riv c'hoazh ?

Laouen e oa o welet ac'hanon, me 'soñj. Va c'harout a rae. 'Fin, joa he doa ouzhin, me 'gred.

'Oan ket chomet pell a-raok mont 'barzh an ti, me 'lâr deoc'h !

— Penaos 'mañ kont ganeoc'h, Itron Spencer ? Ha gant an aotrou Spencer ?

— Ro da vantell din 'ta, va faotr, emezi.

N'he doa ket klevet ac'hanon o c'houlenn keloù eus an aotrou Spencer. Pounnerglev e oa, tost bouzar.

Lakaat a reas va mantell a-istribilh er pres a oa en trepas, ha kas a ris va blev war-dreñv un tammig gant va dorn. Ordinal e vez ganin un troc'h-blev 'giz huruson, setu 'm eus ket da gribañ anezho gwall alies.

— Penaos eo bet gant ho yec'hed, itron Spencer ? emezon adarre, nemet kreñvoc'h, abalamour da vezañ klevet ganti.

— Mat-tre, Holden.

Serriñ a reas dor ar pres.

— Ha te, va faotr, penaos emañ an traoù ganez ?

Diouzh an doare m'he doa savet ar goulenn e oa sklaer hag anat he doa klevet digant ar Spencer kozh e oan bet skarzhet.

— Deus ar c'hentañ, emezon. Ha penaos emañ an aotrou Spencer ? Pareet eo deus ar grip a-benn ar fin ?

— Pareet ! Holden, en em ren a ra evel un... n'ouzon ket petra... En e gambr emañ, va faotr. Kae da welet anezhañ.

2

Pep hini anezho en doa e gambr dezhañ, ya 'vat. Tro-dro dek vloaz ha tri-ugent e oant o-daou, ma n'eo ket ouzhpenn. Joa a dennent diouzh ur bern traoù koulskoude, ha pa vefe war an ton bihan-tout, anat deoc'h. N'eo ket un doare gwall hegarat da gontañ an traoù, goût a ran, met n'eo ket ar pezh a vennan lâret gant ar gerioù-se. Pezh 'm eus c'hoant da lâret eo e vezen alies-mat o soñjal e Spencer, ha ma soñjer re ennañ e teuer d'en em c'houlenn petra an diaoul a zalc'h bev seurt tud. Kromm-tout e oa, c'hwi 'oar, ha spontus e stumm dezhañ, ha pa oa ouzh an daolenn er skol, ha pa zegouezhe dezhañ lezel un tamm kleiz da gouezhañ, e ranke un' bennak eus paotred ar renkad kentañ sevel, dastum anezhañ hag e reiñ dezhañ en-dro. Un dra terrupl eo, d'am meno. Padal, ma c'heller sellet outañ hep mont re zon ganti e c'heller soñjal n'en em denne ket ken fall-se evit un den eus e oad. Da skouer, ur sulvezh ma oan aet gant un toullad paotred all da evañ ur banne chokolad tomm du-se en doa diskouezhet deomp ur c'hozh pallenn Navajo dihailhet, bet prenet gantañ ha gant e wreg digant un Indian bennak e Park Yellowstone. Sklaer hag anat e oa

bet fougeet bras ar Spencer kozh o prenañ anezhañ. Setu pezh 'm eus c'hoant da lâret. Zoken un den kozh-Noe evel ar Spencer a c'hell tennañ plijadur diouzh prenañ ur pallenn.

Digor e oa e zor. Un tamm stokadenn a ris outi koulskoude, nemet evit bezañ seven ha tout. Gwelet a raen anezhañ, azezet en ur mell gador vourret lêr, warnañ ar pallenn e oan o kontañ deoc'h diwar e benn. Sellet a reas ouzhin neuze hag e huchas :

— Piv eo ? A, Caulfield, deus tre, va faotr.

Huchal a rae bepred, pa oa 'maez eus ar c'hlas. Torrpenn e oa a-wechoù.

Kerkent hag antreet 'm boa bet keuz da vezañ deuet. O lenn an *Atlantic Monthly* e oa, ha strewet dre e vurev a-bezh e oa pilulennoù ha louzeier a bep seurt, ha c'hwezh al louzoù Vicks evit ar fri war pep tra. Digalonekaus a-walc'h e oa, dreist-holl evit unan evel don ha n'eo ket en e aez gant an dud klañv. Hag ar c'hozh sae-gambr teuc'h a oa en-dro dezhañ war ar marc'had, unan e oa bet moarvat ganet enni, un druez ! Ne blij ket kalz din gwelet kozhiadoù en o fijamaioù pe o saeoù-kambr forzh penaos. Gant o bruched askornek dispaket-tout, hag all. Hag o divesker. Divesker ar wazed kozh, pe 'vefe war an draezhenn pe forzh pelec'h, ken gwenn ha ken divlev atav.

— Demat, Aotrou, emezon. Bet 'm eus ho kerig. Trugarez vras deoc'h.

Skrivet en doa an notenn-se, o pediñ ac'hanon da dremen hebiou evit lâret kenavo a-raok ar vakañsoù, en abeg ne oan ket da zont en-dro.

— Ne oa ket dav deoc'h ober kement-se. Deuet e vefen forzh penaos da lâret kenavo deoc'h.

— Azez amañ 'ta, va faotr, eme Spencer kozh.

War ar gwele, a venne lâret. Azezañ a ris warnañ.

— Penaos 'mañ kont, Aotrou ? Hag ar grip ?

— Ma faotr, ma n'em santfen gwelloc'h e rankfen gervel ar medisin diouzhtu, eme ar Spencer kozh.

Se a droc'has e alan dezhañ. Kregiñ a reas da sklokal evel un den foll. Sioulaat a reas erfin ha goulenn diganin :

— Perak n'emaout ket er match du-hont ? Soñjal a rae din e oa hiziv deiz ar c'hrogad meur.

— Hag ez eo. Pezh zo, emañ o paouez dont en-dro eus New York gant ar skipailh iskrim, emezon.

Gast, ken kalet hag ur roc'h e oa e wele.

Neuze e teuas da vezañ dic'hoarzh-kenañ, dres ar pezh e oan o c'hortoz.

— O kuitaat ac'hanomp emañ, neuze, emezañ.

— Ya, Aotrou. Gwir eo, 'm eus aon.

Hag eñ o komañs hejañ e benn. Morse ne weli den o hejañ e benn kement hag an aotrou Spencer. Ne oa ket tu da c'houzout hag-eñ e rae se abalamour d'an don ma oa e soñjoù pe just peogwir e oa ur c'hozhiad madelezhus ha n'anaveze ket e fri diouzh e revr.

— Petra 'n deus lâret an Dr Thurmer dit, va faotr ? Klevet 'm eus lâret 'poa bet un hir a bennad-kaoz gantañ.

— Ya 'vat. A-dra-sur. Tost div eur on chomet en e vurev, a soñj din.

— Ha petra 'n deus lâret dit ?

— O... ma. Kaozioù diwar-benn ar vuhez, a zo ur c'hoari anezhi ha tout. Ha penaos e ranker c'hoari hervez ar reolennoù. Jentil a-walc'h eo bet ganin avat. N'eo ket aet e fulor, tamm ebet, se 'm eus c'hoant da lâret. Nemet ne zihane ket gant e gomzoù diwar-benn ar vuhez o vezañ ur c'hoari, c'hwi 'oar.